

ADRIEN DE CARNÉ

Barz an Arvor



Kristen ha Breizad da virviken

AR GALON VAT

Pez-C'hoari plijadurus en eun arrest

Moulet evit an eil weach



BREST

Moulez ru ar C'hastell, 4

1922

ADRIEN DE CARNÉ

Barz an Arvor



Kristen ha Breizad da virviken

AR GALON VAT

Pez-C'hoari plijadurus en eun arvest

Moulet evit an eil weach



BREST

Moulerez ru ar C'hastell, 4

—
1922

Oberou A. de Carné, Barz an Arvor⁽¹⁾

Breiz karet, pez-c'hoari e tri arvest.

Ar yale'had aour, c'hoari farsus en eun arvest.

Ar mabig Jezuz, mister kristen en eun arvest.

Kristof ar C'hreno, mister kristen en eun arvest.

An aotrou Flammig, c'hoari farsus e daou arvest.

Tarsisius, mister kristen en eun arvest.

Saig ar paotr fin, c'hoari farsus en eun arvest.

Barnedigez Doue, mister kristen en eun arvest.

Sac'h ar marichal, c'hoari farsus en eun arvest.

Judikaël, mister kristen en eun arvest.

Ar galon vat, c'hoari plijadurus en eun arvest.

Ar c'hoz vedisin, c'hoari farsus en eun arvest.

Lilien ar Folgoat, mister kristen en eun arvest.

Ar mab foran, mister santel en eun arvest.

Fanch vras ha Fanch vihan, c'hoari farsus en eun arvest

EVIT AR MERC'HED BIHAN

Noz nedeleg, mister kristen en eun arvest.

(1) Ar pesiou ma a gaver e Brest, e moulerez ru ar C'hastell, 4.

Diocese de
Quimper & Léon
Document numérisé en 2016



ARGUMENT



Perig arrive à Plabennec au moment où un jeune homme vient de tomber mort sur la route. Perig donne tout ce qu'il possède, trois écus, afin qu'on célèbre trois messes pour le pauvre défunt. Au moment où il va se remettre en route, il est accosté par un jeune breton, Gwenole. Sans qu'il s'en doute, ce Gwenole c'est, sous une forme humaine, l'âme reconnaissante du mort inconnu. Ils deviennent amis et mettent en commun leur travail et leur gain. Les circonstances leur font gagner une bourse d'or. Gwenole, qui a un profond mépris pour les biens terrestres, l'abandonne à Perig et celui-ci, à son tour, l'emploie à sauver de la ruine un malheureux. Le soir tombe; l'Angelus sonne à l'église de Plabennec, et voilà que, subitement, Perig, la conscience d'ailleurs bien en règle, se trouve auprès de la porte du Paradis. Son patron, Saint Pierre, après quelques petites difficultés, lui ouvre, à la prière de Gwenole, la porte qui donne accès aux éternelles délices.

Heureux les miséricordieux, car ils obtiendront miséricorde (1).



(1) Quelques idées de ce petit drame sont empruntées aux légendes suivantes : *L'Heureux Mao*, de Souvestre, *Le Sac de la Ramée*, de Deulin, et *le Camarade de Voyage*, d'Andersen.

C'HOARIERIEN

PERIG, paotr yaouank.

GWENOLE, paotr yaouank.

FANCH, mestr hostaleuri *An Aval Aour*.

LAOU, e vevel bihan.

FIRBOUCH, urcher, denig koz ha dister.

KLAODA, bestead.

MAZE, born.

JOB, den koz, e gein daou bleget.

LOM, den paour ha bouzar pod.

SANT PER. *Her c'hlevet a reer, hep her gwelet.*


Eur medisin brudet.

Mab ar medisin, 5 pe 6 vloaz.

An aotrou mear.

Ar gward eus an ti kear.

Eun toullad tud diwar ar meaz



KENTA LODEN

Kement ma a dremen e Breiz-Izel, e bourc'h Plabenneg. En eur c'horn eus an teatr, eun tammig taol; kadoriou ha bankou.

KENTA DIVIZ

FANCH, *azezet oc'h an tammig taol, eur werennad win dirazan.*

Mil dan kurun! Eiz heur ha kart, ha Laou ne zeu ket en dro c'hoaz. E pelec'h 'ta e chom ar ginou tarteze se? Eun heur hanter zo aba ma 'z eo eat kuit. Ni a vo divezad evit aoza lein. Ha koulskoude, foar vras Plabenneg eo hirio. Marteze e teuo aman da leina kalz marc'hadourien kezeg ha saout, kalz tud diwar ar meaz, kalz bourc'hisien pinvidik zoken. *O krial hag o lakaat e zourn war e jod kleiz. O la! o la! setu va dant oc'h ober d'in adarre poaniou a bep seurt! O la! o la! eun dant kleuz eo, dant an diaoul hag an ifern. Evomp eur banne; ar gwin a lakaio ar boan da vont kuit, marteze. Eva a ra. O la la! o la! ar boan a zeu krenvoc'h. Laou a zeu o tougen eur baner bounner. Ha te eo, tartouz! te eo lakepod, pezh didalvez. Petra d'it beza ken divezad? lavar 'ta.*

II DIVIZ

FANCH, LAOU.

LAOU

N'oun ket bet evit dont en dro kentoc'h, mestr. Ar boulonjer, ar c'higer, ar marc'hadour amann, ar marc'hadour viou ne felle d'ezo rei d'in na bara, na kig, nag amann, na viou.

FANCH

Na perak 'ta?

LAOU

Abalamour ma tleit da bep hini anezo eur bern gwenneien, pell pell a zô.

FANCH

Da baner a zo leun evelato, ha leun mat.

LAOU

Ia da, mez evit ar weach diveza eo. Warc'hoaz den ne roio mui d'eoc'h marc'hadourez ebet nemet na baot da genta kemend a dleit. Ia, mestr, ia.

FANCH, *droug ennan.*

Ha ne ket echu ganez lavaret d'in kemend all a zorc'hennou hag a ziotachou; marmouz divalo, lorgnez mevelig, truilhen, boed ar groug. N'eo ket echu?

LAOU, *droug bras ennan.*

Eo, eo, echu eo, ha raktal zoken. *O tenna e da-vancher hag ouz her rei da Fanch.* Dalit! Setu va zavancher. N'em eus mui ezom ebet ken anezan. Me lavar evel ar varc'hadourien. Ma n'eo ket paeet ar re ze, ne d-oun ket me kennebeud. Ouspenn eur bloavez bras zo n'em eus ket bet diganeoc'h eun diner toull zoken. Kenavo!

FANCH, *droug ennan atao, o c'hourdrouz.*

Ha n'out ket maget marteze?

LAOU

Eo da, gant eur geusteuken ha ne fellfe ket d'ezo ar moc'h he dibri, Kenavo!

FANCH, *o krial.*

O va Doue! pebez poan a ra d'in va droug dent.

LAOU, *o c'hoarzin.*

Ha, ha, ha! gwell a ze, gwell a ze! Kenavo.

FANCH, *flouroc'h e vouez.*

Selaou, va c'heazik! foar vras Plabenneg eo hirio. Chom ganen, ezom am eus ac'hanout.

LAOU

N'hoc'h eus ket, p'eo gwir ne d-oun nemet eun artouz.

FANCH

N'out ket.

LAOU

Eul lakepod, eur pezh didalvez.

FANCH

N'out ket, n'out ket.

LAOU

Eur marmouz divalo, eul lorgnez mevelig, eun druilhen, eur boed evit ar groug.

FANCH

Tamm ebet, tamm ebet.

LAOU

Petra eo oun me neuze 'ta?

FANCH

Va moutig, va c'hoantik, va mignonig. *Klask a ra lakaat an tavancher adarre da Laou.*

LAOU, *fouge ennan.*

Gortozit eun tamm, aotrou. Mar choman ganeoc'h, c'houi a baeo d'in hirio e berr, ugent lur, da nebeuta, diwar ar pezh a dleit d'in.

FANCH, *laouen.*

M'hen tou d'it, va c'heazik, en hano va mamm ger, Doue r'he fardouno. M'hen tou d'it. *Lakaat a ra an tavancher da Laou.* Sell 'ta! sell 'ta! ema an Aotrou Doue ganeomp. Setu eun den yaouank a zoare duhont. Dont a ra, sur, da c'houlen da zibri ha da eva. Kea buan d'ar gegin gant da baner. *Laou a ya. Perig a zeu. Ema eur c'hoz korn-boud a istribilh ouz e c'houzoug, stag ouz eur goz korden.*

III DIVIZ

FANCH, PERIG.

PERIG

Doue r'ho pinnigo, aotrou. Ma ne fagian ket, eun hostaleuri eo a zo aze dirazoun.

FANCH, *laouen.*

Just avat, hostaleuri *an Aval Aour*, ha n'hellfed ket kavout he far. N'eus ket eun all gwelloc'h na brudetoc'h e Plabenneg.

PERIG

Sellit 'ta! emaoun e Plabenneg dioc'h a livirlt.

N'anavezan ket ar vro ma. Eus eur vro a bell e teuan, eus a Vrelez, eur vourc'h vrag tost d'ar mor. Perig eo va hano me.

FANCH, *o krial.*

O la! o la! la!

PERIG

Petra ganeoc'h?

FANCH

Netra, nemet eur c'hildant kleuz, eur fouldren kildant a ra poan d'in. Hag emaout o vont pell?

PERIG

N'ouzoun ket; klask a ran eul labour bennak, rag oun chomet va unan penn war an douar. N'em eus mui na par na kar. Ne jome ken ganen nemet va eontr koz, Jakez, breur va zad koz. Maro eo, daou viz zo, ouz va lezel va unan da heritour.

FANCH

Ha kalz madou ac'h eus bet war e lerc'h?

PERIG

Goude maro va eontr, red mat eo bet paea mizou e glenved diveza ha re oferen an Anaon. Evit hen ober, an noter en deus gwerzet a bez koz traou an hini koz.

FANCH

Ha petra a jom ganez, neuze?

PERIG

Eun tamm braoik a beadra. Da genta ar c'hornboud ze n'eus ket bet den d'her prena. Me zo bras va fougé gantan. Me c'hell gantan ober eun tamm muzig, eun tamm son laouen ha skiltrus.

FANCH

Klevomp 'ta. *Perig a zon.* O la la! An trouz se a ra poan d'am dant. Lavaret e ve edo eur vioc'h teo o vlejal. *Perig a zon adarre krenvoc'h.* Tao 'ta, mil gurun, me a vo bouzar ganez. *Perig a c'hoarz.* Ha n'ec'h eus ket bet tra all ebet warlerc'h da contr?

PERIG

Eo, eo; arc'hant! arc'hant brao. Selaouit! *Lakaat a ra e arc'hant da zen en e zourn.* Selaouit! *C'hoarzin a ra.*

FANCH

Pegement?

PERIG

Tri skoed! tri skoed arc'hant gwenn, unan, daou, ha tri. N'em eus ket bet biskoaz kemend all. Daoust ha dibri a c'heller eul lein vat gant tri skoed?

FANCH, *laouen.*

Feiz va Doue, her c'hredi a ran. Tri skoed! gant tri skoed e c'heller ober eul lip e hao eus ar re gaera. Eun den bennak, ha pa ve zoken eur roue e ve, kalz re eo d'ezan tri skoed da leina.

PERIG

Gwir? Gant va zri skoed, me a c'hello kaout silzig, kig moc'h, viou fritet ha bara fresk?

FANCH

Leiz da gof,

PERIG

Eva gwin ruz ha gwin gwenn?

FANCH

Bete da zaoulagad.

PERIG

Hag eur banne kafe du da c'houde?

FANCH

Eur bodezad leun az pezo.

PERIG

Mat. Roit d'in eur c'hofad mat er c'hiz se

FANCH

Ne ket diez. *O krial.* Laou, lavar d'ar c'heginer aoza lein evit an aotrou ma.

LAOU, *er meaz.*

Ia, mestr. An aotrou mear a zeu.

IV DIVIZ

FANCH, PERIG, AR MEAR.

AR MEAR

Lavar 'ta, Fanch. Tud zo hag o deus lavaret d'in e kaffen aman eur c'hravaz hir ha ledan. Daoust ha gwir e ve?

FANCH

A zo gwir. Ezom hoc'h eus anezan dioc'htu?

AR MEAR

Ia. N'eus nemet eur pennad, eur maread tud en em gave bodet du hont, e kichen park Yann-Vras. Eat oun da welet, evel just. Ha petra e oa, Fanch? Eur paotr yaouank maro, da c'hourvez war ar c'hla-zen.

PERIG

Ha gouzout a reer piou eo?

AR MEAR

N'ouzer ket. Gwisket eo gant koz tammou dilhad ha n'eus en e c'hodellou na gweneg na paper ebet.

FANCH

Eur ribler bennak, marteze, eur galouper bro marvet gant an naon.

AR MEAR

E ve marvet gant an naon, her c'hredi a rafen, mes ne gav ket d'in e ve eur ribler anezan. Hennez, Fanch, a zo kaer kenan e zremm da welet, gant mousc'hoarz eun eal warni. Kroazet e oa e zaouarn paour war e galon, eur chapeled en dro d'ezo. Ne c'hellomp ket dilezel e gorf er c'hiz se. Rakse eo em eus goulennet da gravaz diganez, evit hen dougen d'an ti kear.

FANCH

Ia, aotrou mear, mont a ran d'her c'herc'hat, *Fanch a ya kuit*,

V DIVIZ

PERIG, AR MEAR.

PERIG

Livirit d'in, aotrou mear, mar plij. P'eo gwir eo marvet ar paotr Doue ze hep lezel eur gweneg zoken war e lerc'h, e gorf paour a vo lekeat en douar hep tamm linser, hep tamm arched ebet zoken. Al linser hag an arched, n'eus fors pegen dister e vent, a goust eun dra bennak evelato.

AR MEAR

Ia sur, mez e kement ti kear zo, ez eus atao eur yalc'hadig a wenneien evit sebelia ha bezia an divroidi, an dremenidi, ar re baour a varv ha n'ouzer ket piou int.

PERIG

Mat. Dioc'h ho lavar, ar paotr maro a vo douget e gorf d'ar vered. Da c'houde, neuze, den ne bedo evitan, dre ma n'anavezer na kar na mignon ebet d'ezan, na petra 'ta?

AR MEAR

Gwir eo.

PERIG

Me fell d'in e vezo lavaret evitan oferennoù. Anaout a rit an aotrou person?

AR MEAR

A dra zur. Va gwella mignon eo.

PERIG

Brao 'ta! Setu aman tri skoed. An tri skoed ma n'em eus ken; mez o rei a ran a greiz va c'halon.

Roit i hoc'h unan d'an aotrou person a lavaro teir oferen, en enor d'an Dreinded sakr, evit ar paotrig eat d'an Anaon.

AR MEAR

O rei a rin, va faotr. Mes petra a jomo ganez da c'houde?

PERIG

Va divreac'h ha skoazel an Aotrou Doue.

AR MEAR

Skuilla raio e vennoz warnout, rak da galon a zo mat, evel a welan. Kenavo, va mab.

PERIG

Kenavo, aotrou mear. *Ar mear a ya kuit.*

VI DIVIZ

PERIG, *e unan, d'an dud.*

Echu eo breman an abaden ganen e Plabenneg, ha n'em eus tra ebet ken da ober nemet mont pelloc'h, va zud vat.

GWENOLE, *er meaz.*

Perig! Perig! *Perig, souezet eun tamm, a zelaou ha goude e kendalc'h da gomz.*

PERIG

Mar gellan kaout eun tamm labour, me zo krenv, me zo yaouank, gounid a rin va bara pemdeziek ha n'em eus ket ezom netra ouspenn.

GWENOLE, *er meaz atao.*

Perig! va mignon karet!

PERIG

Arsa! ne gouskan ket e doare. Va hano eo a glevan; ema unan bennak ouz va gervel. *Gwenole a zeu, laouen e zremm, warnan dilhad sul brao eun den diwar ar meaz. Dougen a ra eur zac'h bihan ouz e skoaz. Ema en e zourn eur vaz hir ha kaer aour fin, mein talvoudus stag outi.*

VII DIVIZ

PERIG, GWENOLE.

GWENOLE

N'anavezet ket ac'hanoun, Perig?

PERIG

E nep giz, sac'h an dien.

GWENOLE

N'eus fors. Va anaout a ri divezatoc'h. Petra outout ober?

PERIG

Netra.

GWENOLE

Mat; me, er c'hontrol, a oar ober pep tra, n'eus fors pegen diez e ve.

PERIG, *souezet.*

Gwir? Sell 'ta? Kaera baz ganez! eur vaz aour eo, leun a berlez fin, leun a vein talvoudus. E pelaeac'h e peuz kavet eur vaz er c'hiz se?

GWENOLE

En eur vro en em gav pelloc'h eget an douar. Me fell d'in beza da vignon leal, Perig; ni a labouro a unan ha kement a c'hounezimp a vo daou hantere etrezomp.

PERIG

Ne c'houlennan ket gwell. Deomp gant hon hent neuze, hon daou.

GWENOLE

Gortoz eun tamm! Kredi a rafen emañ o vervel gant an naon.

PERIG

Feiz! te zo eun divinour dispar. Me zo du va naon.

GWENOLE

Gwell a ze. *O tigeri e zac'h.* Dal! setu kig mat, bara gwenn hag eur voutailad win koz. Dibri a c'hellez kement a giri, nemet eun dra, eun dra hep ken.

PERIG, *souezet.*

Pehini?

GWENOLE *o kemeret er zac'h eun draig pleget mat en eun tamm paper.*

An dra ze eo. Eur grampoezen winiz eo. *Goude beza diskouezet ar pakadig da Berig, hel lakaat a ra er zac'h adarre.* Ar grampoezen ma, selaou mat, Perig, a zo evidoun. Na zebr ket an distera tamm anezi. He dibri a rin me, pa zeuin en dro, hag awalc'h bras am bezo ganti. Emaoun o vont da bidi Doue eur pennadig d'an iliz. Va brasa levenez me, Perig, eo pidi Doue. Debr leiz da gof en eur va gortoz.

PERIG

Bez dinec'h, paotr; ne jomo ket an traou mat se da louedi er zac'h. *Kriadennou spountus er meaz.*

EUR MEDISIN, *er meaz.*

O! Doue madelezus! ho pet truez ouzin! Saveteit va bugel muia karet! Ema o vont da vervel. *Ar medisins a zeu, o tougen eur c'hrouadur 5 pe 6 vloaz, distach, ar goad o redek eus e benn.*

VIII DIVIZ

PERIG, GWENOLE, AR MEDISIN, AR BUGEL.

AR MEDISIN

Buan! buan! tud vat. Ema en e dremenñvan. Setu eun hostaleuri. Kavout a rin sikour enni.

GWENOLE

Ne d-it ket, aotrou. Roit ho pugel d'in. N'eo netra. Me her pareo dioc'htu. *Gwenole a gemer, en e zac'h, eur voestlig a zo el louzou ebarz, hag ha laka ar bugel war e zaoulin.*

AR MEDISIN

Kouezet eo ouz eur mean en eur c'hoari, ha n'oun ket bet evit her para, evidoun da veza eur medisins brudet.

GWENOLE

N'ho pezet ket a aon. *Frota a ra penn ar bugel gant al louzou.* En han' Doue, bugelig karet, bez pareet a grenn. *Ar bugel a zav en eun taol, a gerz, a lamm, a c'hoarz hag a zeu da boket d'e dad.*

AR BUGEL

Tata! Tata! n'em eus mui a boan, n'em eus mui.
Deomp da c'hoari adarre, deomp 'ta!

AR MEDISIN, *e zaouarn kroazet.*

Pebez burzud! va Doue karantezus! pebez lou-
zou! Na c'houi zo gwiziek, aotrou!

GWENOLE

Ne ket me eo em eus pareet ho pugel. An Aotrou
Doue eo. Gant al louzou ma, roet en e hano, ar re
zall a wel, ar re gamm a vale, ar re vouzar a glev,
ar re varo a zav da veo.

AR MEDISIN

Gwir eo. Mes me zo bras va anaoudegez vat evi-
doc'h. Deuit d'am zi. Abenn eur c'hart heur bale e
vezimp di, ha me roio d'eoc'h eur yalc'had vat a
aour evit ho tigoll. Me zo pinvidik bras.

GWENOLE

Nag aour, nag arc'hant, na gwenneien seurt ebet.

PERIG

Petra a rez? Penaos 'ta? Kinnig a reer d'it eur
yalc'had aour! ha leverez nan! Petra sonjez? eur
yalc'had aour! te zo foll mik e doare.

GWENOLE, *krenv e vouez.*

Ne fell ket d'in, Perig, koumpren a rez?

PERIG

Mil diaoul ruz! N'em eus gwelet a viskoaz eur
genaouek, eur Yannig diot evel dout,

GWENOLE

A gav d'it? Evela.o ne gemerin ket ar yalc'had.
*Perig a azez hag a grog da zibri ar boed a zo e
sac'h Gwenole.*

AR MEDISIN

Ma ne fell ket d'eoc'h dont, chomit aze da vihana
d'am gortoz. Ne rin nemet mont, ha dont en dro
raktal.

GWENOLE

Ne roan ket d'eoc'h va ger e chomin d'ho kedal.

PERIG

Me jomo! Aotrou, me jomo! Na zelaouit ket ane-
zan. Foll eo. Ma n'en deus ket ezom a aour, me am
eus. Ni a labour a unan. Me gemero ar yalc'had. Vad
a raio d'eomp hon daou he c'haout. Kenavo bre-
maik, aotrou. *Ar medisin hag e vugel a ya kuit.*

IX DIVIZ

PERIG, GWENOLE.

GWENOLE

Ha breman, epad m'emaout o tibri, me a ya d'an
iliz evel m'em eus lavaret d'it. Mar teu en dro ar
medisin gant e yalc'had aour, me a zifenn ouzit,
Perig, na gemeri eur gwennege zoken anezi. Ous-
penn ze, sonjal a rez...

PERIG

Sonjal?

GWENOLE

Ia. Ne zibri ket...

PERIG

Da grampoezen! nan nan, te a dorr va fenn d'in gant da ravoderez a grampoez. *Gwenole a ya kuit.*

X DIVIZ

PERIG, *e unan, o tibri atao.*

Nag hi zo mat al lein ma. Naon eur bleiz am boa. Evomp eur banne da lakaat da zisken an holl draou mat se. *Eva a ra.* Pebez gwin! Nag hen zo tomm! Mat, echu eo? *O furchal er zac'h.* Ia, echu eo al lip e bao. Sell! petra an dra ze? Ha! krampoezen ar ravoder eo. Na perak 'ta e fell d'ezan ker start na zebrfen ket anezi? Eur grampoezen a zoare e tle beza. Ba, ba, ba! n'en deus ket difennet na zellin outi; eun taolig lagad hep ken, da welet hag hi a ve henvel ouz ar c'hrampoez all. *Digeri a ra ar paper ha displega ar grampoezen. He zevel a ra astennet mat en e zaouarn, dirak e zremm.* Holla 'ta! tud keiz, ne welit mui va fenn, hein? Kuzet eodindan al loar, loar an Aotrou Doue! *O lakaat e fri ouz ar grampoezen.* O la la la la! pebez c'houez ganti! *O krial.* O! gwella c'houez! *O krial krenvoc'h.* Pebez c'houez ganti! *En eur en em zifreta gant e blijadur, regi a ra ar grampoezen.* O mil batatezen! petra 'm eus great 'ta? Petra rin me breman? Mat. P'eo gwir eo roget neat, perak ne zebrin ket eun tammig anezi? Egile ne ouezo tra. Eun tammig, eun tammig bihan bihan! *Dibri a ra eun tamm.* O! Santez Anna! O! Santez Barba! *Dibri a ra.* Klaoustre na zebrin morse, er baradoz, krampoez ken dispar, ken flour hag houma. *Dibri a ra.* Na c'houi ken-nebeud, aotrou Sant Per, va faeroun, a garan kement. *Dibri a ra ken na jom mui gantan nemet tam-mou bruzunet.* Foeltr an diaoul! Petra rafe va mignon breman gant ar bruzun dister ma? Netra,

netra. *Dibri a ra ar bruzun diveza ha frota e gof.* Nag hi oa mat! Great e oa bet gant an elez ar grampoezen venniget ze, sur eo.

XI DIVIZ

PERIG, GWENOLE, *hep e vaz aour.*

GWENOLE

Da zremm a zo laouen, Perig. Debret mat ec'h eus, a gredan.

PERIG

Ia sur. Ha te ? pedet mat ech eus an Aotrou Doue dioc'h da c'hoant?

GWENOLE

Mat kenan, evidout, dreist holl. Eun tamm naon am eus ive breman d'am zro. Evel m'em boa gourc'hemennet d'it, miret ec'h eus d'in va c'hrampoezen.

PERIG, *oc'h ober al leue.*

Pe grampoezen?

GWENOLE

Va hini me. Te a ra al leue. He lezet ec'h eus er zac'h evidoun, hein?

PERIG, *oc'h ober neuz da veza souezet neat.*

Petra 'ta? Bez' ez oa eur grampoezen er zac'h? Ne ouien ket avat, ha n'em eus ket gwelet anezi. Klask te da unan. *O tigeri ar zac'h.* Sell! n'eus tamm krampoez ebarz.

GWENOLE, *o c'hourdrouz krenv.*

O paotr fall! Gaouiad touet; peus ket a vez pa levereze gevier ken divalo ze? Bez dinec'h: me az

lakaio dizale, ha daoust d'it, da lavaret ar wirionez, te welo. Red mat eo d'in mont da gerc'hat eun dra bennak da z'fibri, p'eo gwir e peus lonket va zam-mig boed paour.

PERIG

Ne ket gwir. *Gwenole a ya kuit.*

XII DIVIZ

PERIG, *e-unan, o komz d'an dud.*

Ha ne gav ket d'eoc'h, Bretoned fur, ez eo va mignon foll eun tammig? eun tamm brao a banezen eo, eur penn skanv a zen a zo troet e spered. Gwelit! Eun den pinvidik mor a ginnig d'eomp eur bern pesiou aour ha ne fell ket d'ezan her c'heme-ret! *O sonjal.* A hend all, ne zeu ket buan en dro an aotrou ze gant e aour, ha, fenoz, 'm eus aon, n'hor bezo ken da goania nemet pedennou va mignon. Kement se ne lakaio ket bara en hor c'hof. *O skei ouz e dal gant e zourn.* Sellit! kavout a ran, en eun taol, an tu da c'hounit eur bern pesiou arc'hant da nebeuta. Va eal mat eo, sur, a gas d'in ar zonz gaer ze. *Gwenole en deus lezet, en e zac'h,* boestlig al louzou burzudus o deus pareet ar paotrig. *Kemeret a ra ar voestlig er zac'h.* Deiz ar foar vras eo hirio aman. Eleiz a dud zo. Me a bareo kement klanvour a vezo gant al louzou ma. Mes peñaos e c'halvin an dud? Sell! diot ma 'z oun! va c'horn boud, na petra 'ta? va c'horn boud. *Pignat a ra war eur gador hag a grog da zen gant e gorn boud.* *Eun toullad tud a zeu raktal, en o zouez Fanch, eur mouchouer gwenn en dro d'e benn ha d'e elgez, o veza poan atao d'e gildant.*

XIII DIVIZ

PERIG, MAZE, LOM, KLAODA, JOB, FANCH, AN TOULLAD TUD.

PERIG, *huel ha rok e vouez.*

Aotrounez, itrounezed, goazed, merc'hed ha dimezelled, emaomp e Plabenneg, mes diwallit! ne jomimp aman nemet eun dervez, eun dervez hepken. Va mignon ha me a zo medisined dispar a laka da vont da netra pep seurt klenvejou, n'eus fors peger fall ha drouk e vent. Mar deus en ho touez tud klanv, tud vac'hagnet, tud toc'hor, tud diot zoken, pareet e vezint gant va louzou burzudus, ha ne gousto da bep hini anezo nemet eiz real ha netra ken. *Eur zon korn boud.* Eiz real! eiz real! eiz real! *Eur zon korn boud adarre.* Gwelomp 'ta! Piou ac'hanoc'h a zo klanv, piou, piou, piou?

EUN TOULLAD TUD, *o krial*

Me, me, me, me, me!

PERIG *o tiskenn diwar e gador.*

Gortozit, va zud keiz, gortozit. Eur medisn mat a fell d'ezan kaout ar re glanv holl a unan dirak e zaoulagad. Setu eur bank brao. Azevit holl warnan. *Maze, Lom, Klaoda, Job ha Fanch a azez o femp an eil tost d'egile war ar bank.* An toullad tud a ya eun tamm pelloc'h. Ha breman, diwallit; emaomp o kregi da labourat. *Da Vaze.* Petra d'eoc'h va den mat? Roit eiz real da genta. *Maze a ro.* Petra d'eoc'h?

MAZE

Petra? Va lagad kleiz a zo maro pell zo. An hini deou avat, a grog da veza gwall glanv ive, ha ne welan mui nemeur gantan, koulz lavaret.

PERIG, *fouge ennan.*

Ha ne d-eus ken? N'eo netra. Lekeomp eun ne-beud louzou ouz' al lagad maro d'her parea hag ouz al lagad all d'her miret da vont da goll evel egile. *Perig a laka al louzou gant e viz.* Mat; it en dro da azeza war ar bank. *Maze a ra.* Dal a unan. D'eun all breman. *Job a zeu, daou bleget e gein gant ar boan. Rei a ra eiz real da Berig.*

JOB

Setu va arc'hant, aotrou medisin.

PERIG

Bennoz Doue. Ha pe seurt droug ganeoc'h, tonton, ma 'z oc'h kroum ha daou bleget er c'hiz se?

JOB

Setu aotrou. Eun taol korn eo am eus paket digant eur goz vioc'h zu ne ra nemet tourtal. Poan vras am eus ha ne c'hellan kousket tamm gant an darsien.

PERIG, *oc'h ober neuze da veza nec'het.*

O la la la! fall fall eo kement ma. Ha peleac'h eo he deus ar vioc'h villiget se skoet ganeoc'h?

JOB

Aze, e kreiz va c'hein paour, aotrou medisin.

PERIG

Sac'h an dienez! ne c'hellan ket lakaat al louzou aze va unan. *O lakaat al louzou en eun tamm paper.* Dalit! setu louzou evit hoc'h eiz real. C'houi o lakaio hoc'h unan tronoze e toull ar gouli.

JOB

Ia, aotrou.

PERIG, *krenv e vouez.*

Da biou, da biou breman? *Klaoda a zav, Besteod eo evel eur iar.* Peleac'h ho troug?

KLAODA

Ne... ne... n'em eus... ne... n'em eus... ke... ke... ke... ket a... ket a zroug.

PERIG

Na perak 'ta e teuit aman neuze?

KLAODA

Ne... n'em eus... n'em eus... nene... nemet... eun... eun tamm po... popo... poan... da... dada... da gao... gaogao... da... gaozeal.

PERIG

Ne ket diez her gwelet. Paour keaz! ne c'hellfe ket zoken lavaret e hano.

KLAODA—

E... e... eo, eo... Kla... Kla... Klaklakla... Kla... Klaoklao... Kla... oda.

PERIG

Diskouezit ho teod. *Klaoda a ra.* Eun tammig eus al louzou ha c'houi a vo dizale ho teod kel lemm hag hini eun alvokad glabouser. *Perig a laka al louzou war beg teod Klaoda.* Hema a ra pouh pouh gant an heug en deus. *Rei a ra eiz real da Berig.*

FANCH, o sevel.

Pebez souez ganen, Perig! Pa gomzen ouzit hirio vintin, ne ouien ket me, tamm ebet, e vijes medisins. Mat; setu eiz real; o rei a ran d'it a greiz kalon, mar gellez parea evit mat an dant kleuz daonet se a ra kemend a boan d'in.

PERIG

Digorit frank ho kinou. *Fanch a ra.* Pe war zu eo an dant fall?

FANCH

War an tu kleiz. *Digeri a ra adarre e c'hinou.*

PERIG

Ia da! gwelet a ran. Doun eo evel eur puns. Gortozit. *Lakaat a ra al louzou e toull an dant. Fanch a ya en dro da azeza. Perig a zell ouz Lom.* Piou eo an den koz ma? *Lom ne finv ket muioc'h eget eur pod.* Piou oc'h, tad koz? *Lom ne finv ket. Perig a gri krenvoc'h.* Piou oc'h? Petra hoc'h eus? Petra hoc'h eus? *Perig a ya d'e gichen hag a zon e toull skouarn Lom gant e gorn boud. Lom a jom ker sioul ha ken diflach ha tra.* Santez Barba venniget! n'em eus morse gwelet eur seurt keuneuden.

KLAODA

Bou... bou... bou... boubou...

PERIG, o c'hoapaat.

Ia, ia, boubou... bouboubou... bouzar eo, moarvat. Mes na gomzit ket ken na vezo deut al louzou da lemma eun tamm gwelloc'h ho teod.

FANCH

Hennez, Perig a zo bouzar en hevelep doare na glefje ket ar gurun o koueza en e gichen. Paour bras eo ive, ha ne c'hello ket rei d'it eiz real.

PERIG

N'eus fors. Me her pareo evit netra, evit bennoz Doue. *Perig a laka al louzou e diskouarn. Lom a jom atao sioul hep lavaret na ger na grig.*

FANCH, o krial krenv.

O la! o la la! nag a boan am eus, Perig. Petra eo da louzou an diaoul? Me zo krenvoc'h kalz poan va dant. Aiou! Aiou! Hag ar re all, pareet int? Lavar 'ta, Maze, penaos ez a ganez da lagad klanv?

MAZE

Fall kenan; ne welan ket gwelloc'h gantan; hag egile a ya war wasaat ive. Me 'm eus aon a vezo dall a grenn bremaik.

FANCH

Gwir? Ha te Klaoda? Kaozeal a c'hellez easoc'h breman?

KLAODA

Ia... iaia... va... va... vava... va ze... va zeod...

FANCH

Ro peoc'h 'ta, balbouzat a rez gwasoc'h gwas. *Droug bras ennan.* Mignoned, Perig en deus great goap ac'hanomp. Eur gaouiad, eul lampon, eul laer n'eo ken. Kemeromp hor gwenneien digantan.

AN TOULLAD TUD

Ia, ia! harz al laer! Krogomp el laer! *An holl en em sllap outan, o kemeret an arc'hant en e c'hodel. Bountet ha sachet eo. An taoliou dourn, an taoliou troad a gouez start warnan.*

PERIG, o krial krenv.

O la! truez! truez! Ahi! ahi! hi, hi. *Lenva hag hirvoudi a ra. An holl a ya kuit ouz hel lezel e unan penn.*

XIV DIVIZ

PERIG, o ouela dourek.

O Sant Per! va faeron, perak hoc'h eus lezet ar re ze d'am frota a c'hoari gaer evelse? Hi, hi, hi, heu, heu... Va gwenneien eat a bez ganto! Hi, hi... hi... hi... Ha va faour keaz penn skoet ker krenv ma 'z eo breman evel pa ve eun aval poaz e ve... Hi, hi, heu heu...

XV DIVIZ

PERIG, GWENOLE.

GWENOLE

Petra glevan 'ta? petra zo va mignonig?

PERIG, dinerz e vouez.

Eur maread tud fall a zo kouezet warnoun, d'am laza, a gav d'in.

GWENOLE

Na perak 'ta?

PERIG

Eur vanden dud klanv m'eo bet fellet d'in o farea gant da louzou, evit gounid eur bernig gwenneien; mes n'int ket bet pareet e nep giz.

GWENOLE

Gwir?

PERIG

Ia; an hini oa born a zo dall breman. An hini ne oa gantan da genta nemet eun dant fall, a zo breman eun dant brein. An hini a valbouze a valbouz gwasoc'h kalz. Koulskoude n'em eus lekeat ouz o foaniou nemet al louzou m'ac'h eus pareet ganto ar paotrig, te oar?

GWENOLE

Ia; mes me a zo ganen ar galloud da barea gant al louzou ma. Ganez avat, n'eo ket. E peleac'h eo o deus great poan d'it?

PERIG, o tiskouez e benn.

Em fenn paour, hi hi hi!

GWENOLE

Deus aman. *Gwenole a gemer eun tamm louzou hag a frot gantan penn Perig.*

PERIG, laouen, o c'hoarzin.

Sell 'ta! pareet oun me ive. Pebez burzudou a rez atao! Te zo sorser, sur, pe vedisin gwiziek eus ar gwizieka. Mat; laouen oun ha laouennoc'h e vijen ma n'o dije ket Fanch hag ar re all lipet va liardou diganen.

GWENOLE

Mat o deus great; n'ez poa ket gounezet an arc'hant se.

XVI DIVIZ

PERIG, GWENOLE, AR MEDISIN.

AR MEDISIN, *o tougen eur yalc'had aour.*

Na laouen oun me ouz ho kavout aman adarre. *Da Wenole.* Dalit, setu an digoll am eus lavaret her rofen d'eoc'h, p'eo gwir ho peus pareet va bugelig paour. Ar yalc'had ma a roan d'eoc'h. Leun eo a besiou aour eus ar re gaera.

GWENOLE

Ho trugarekaat a ran a greiz kalon, aotrou mat. Mes lavaret em eus d'eoc'h na fellje ket d'in digemeret eur gweneg zoken, hag hel lavaran adarre.

PERIG *da Wenole.*

Kemer 'ta, tarzot, kemer, penn foll, kemer 'ta.

AR MEDISIN

Kemerit ar yalc'h, aotrou, ho pidi start a ran.

PERIG, *o kregi prim er yalc'h hag ouz he lakaat en e c'hodel.*

Bennoz Doue, aotrou, an arc'hant a zo red d'eomp. Bennoz Doue! *Ar medisn a ya kuit. Perig a ziroll da c'hoarzin 'o sellet ouz Gwenole.*

XVII DIVIZ

PERIG, GWENOLE.

GWENOLE, *rust e vouez.*

Emaomp o welet breman, Perig, pe eul laer out, pe n'out ket.

PERIG

Eul laer?

GWENOLE

Ia, eul laer. Piou eo en deus pareet ar bugelig? Piou ac'hanomp?

PERIG

Te eo, her gouzout a ran kerkouls ha te.

GWENOLE

Neuze an arc'hant se a zo d'in. Ro ar yalc'had.

PERIG

N'he roin ket.

GWENOLE, *rust.*

Ro ar yalc'had dioc'htu, ma ne fell ket d'it ez in da gerc'hat an archerien. *Perig a ro en eur c'hri-gnouza.* Mat; me am eus eun tamm truez ouzit evelato; ranna a rin an arc'hant etrezomp. *Digeri a ra ar yalc'h ha kounta an arc'hant.* Sell! tri rollad mil lur. Setu da loden, eur rollad mil lur.

PERIG

Petra levezet? Mar d-eus tri rollad mil lur, n'em eus ket awalc'h gant eur rollad hepken. Dleet eo d'in eur rollad hanter, p'eo gwir ec'h eus lavaret e vije daou hanteret etrezomp kemend a c'hounezfemp.

GWENOLE

Ne ket evelse eo e kountan me, Perig.

PERIG

Ha penaos e kountez neuze?

GWENOLE

Penaos? eur rollad mil lur evidoun, eun all evidout, hag an trede...

PERIG

Da biou an trede? lavar 'ta.

GWENOLE

D'an hini en deus debret va c'hrampoezen.

PERIG *o kregi buan en arc'hant.*

Me eo, mignonig, me eo, me eo, sur.

GWENOLE

Ne ket gwir. Touet ec'h eus d'in, kouls lavaret, n'ez poa kavet krampoezen ebet em zac'h.

PERIG

Me? paour keaz, me am eus lavaret kement se? Te zo gwall fall da zonz, va Doue. Eur grampoezen eus ar re gaera eo em eus kavet er zac'h. Melen aour e oa, ledan evel al loar, ha ker flour da zibri ma kreden e vije bet poazet gant an elez. Dizonjet ec'h eus?

GWENOLE

Va selaou, Perig. Te zo eul louarn re fin evidoun. Sell! tri mil lur zo er yalc'had. Kemer anezo a bez; ne fell ket d'in kemeret eun diner anezo. *Rei a ra ar yalc'had da Berig.* Te a blije d'in kalz muioc'h d'ar mare ma roes da zac'hadig liardou da lakaat oferennou evit ar re varo.

PERIG

Na penaos 'ta e ouzout em eus roet va gwenneien evit an Anaon? Piou en deus hel lavaret d'it?

GWENOLE

Ha fors zo d'it? Ar pezh zo sur eo n'emaout mat breman nemet da lavaret gevier ha dastum berniou aour. Kenavo, ha mar am c'hreded, kea da gaout da dad kovesour, ar c'henta 'r gwella. Kenavo, *Gwenole a ya kuit.*

XVIII DIVIZ

PERIG, *e unan.*

Kenavo, koz randoner, glabouser, trabel a laka an dud da gousket gant da brezegennou. Mat. Gwella tra zo m'ema ganen, breman, da vihana, ar yalc'had leun a besiou aour. Ha breman petra a rin? Labourat? Foei! Ampoezon! Al labour n'eo nemet evit ar re baour, an dud dister. Ne rin ken tra all nemet dibri mat, lakaat dilhad kaer, dilhad aotrou. *C'hoarzin a ra.* Ha, ha, ha, ha! Sonjit 'ta! Tri mil lur! Ha, ha, ho! ne ket tri skoed eo evel kent. Nan, nan, nan! Me a droio va spered gant al levenez. *Kana a ra krenv, en eur zansal.*

Mari baour en han' Doue

Souben an anduillen, *ha war an hevelep ton:* La la la la la la la!

La la la la la la!

O trei buan evelse koueza a ra a dreuz kof d'an douar.

XIX DIVIZ

PERIG, 'GWARD AN TI KEAR, FIRBOUCH, EUN TOUL-LAD TUD.

GWARD AN TI KEAR, *eur paper en e zourn, o lenn.*

Rei a reer d'an holl da anaout barnedigez barnerien kador varn kear Vrest. Ar varnedigez se, douget

d'an trede dervez warn ugent a viz eost eus ar bloaz mil nao c'hant ha daouzek, a lavar eo dleet d'eur maread marc'hadourien, gant Fanch, Paol, Jilez Krevier, mestr hostaleuri an *Aval Aour*, e Plabenneg, daou vil nao c'hant lur ha pevar ugent. O veza n'en deus, Fanch Krevier, rôet da hini anezo ar c'henta gwennege diwar e dle, ar varnerien a c'hourc'hemen ma vezo hirio dioc'htu lekeat foar war e beadra, war e holl draou, fall pe vat, nevez pe goz, arrebeuri, dilhad, boed, boutailhou, podou a bep seurt, listri kegin hag all. Lukaz Firbouch, urcher e Plabenneg, a grogo e traou Fanch evit o gwerza hervez al lezen. *Gward an ti kear a ya kuit. Fanch a zeu, eur vaz teo en e zourn.*

XX DIVIZ

AN HEVELEP RE, FANCH.

FANCH, *kounnar vras énnan.*

Petra rit holl aze evel eur vanden azened, tud diot ma 'z oc'h? Ar re a jomo aman, gwaz a ze d'ezo. Ha klevet a rit? *Sevel a ra e vaz da skei ganto. An holl a ya kuit o redek, nemet Firbouch.*

XXI DIVIZ

FIRBOUCH, FANCH.

FANCH

Na c'houi? petra fell d'eoc'h, piou oc'h?

FIRBOUCH

Me eo Firbouch, urcher, a zeu da gregi en ho madou.

FANCH, o c'hoarzin gwenn.

Da gregi em zraou? Ha, ha, ha, ha! deus va denig koz, deus kornandon dister ha divalo. Kregi em zraou? Digor frank da ziskouarn hir, lastez urcher, ha selaou: Abarz ma kemeri eur spillen hepken diganen, me az flastro, en eun taol, evel eur gelienen, evel eur c'hoanen. Ma n'eo ket eur vez ober eur seurt micher, heskina an dud vat, kas d'an dienez eun tad paour a zo gantan c'houec'h bugelig?

FIRBOUCH

Ne lavaran ket, mes kregi a rin evelato en ho traou, hag ez an d'hen ober dioc'htu.

FANCH, o teurel e vaz, a grog start e Firbouch.

Hejal, bounta ha sach a krenv a ra anezan.

Urcher daonet, koz varc'hadour paperiou louz. Me az tiskroc'h enno beo buhezek. *Kounnaret mui oc'h mui. Klevet a rez, hein? Klevet a rez?*

Oc'h en em ganna er c'hiz se, Fanch a grog e jupen goz Firbouch a rog eun tamm mat anezi. Perig a zeu.

XXII DIVIZ

FIRBOUCH, FANCH, PERIG.

FANCH, *kounnaret atao, o welet Perig.*

Sell! setu ma teuez ive te, medisin an Ankou, a laka ar gristenien da vervel. N'out ket bet pilet awalc'h dioc'h da c'hoant? *O c'hourdrouz. Gortoz!* ne vezo ket hir ar jabadao.

PERIG

Gortozit hoc'h unan, Fanch, ha mar am lezit da gomz, kredi a ran na jomo ket pelloch ganeoc'h c'hoant da skei ganen.

FANCH

Na penaos?

PERIG *da Firbouch.*

Ankounac'heat em eus pegement en dije Fanch da baea.

FIRBOUCH

Daou vil nao c'hant lur ha pevar ugent. Ouspenn ze roget en deus va jupen. Sellit outi. Eun druilhenn n'eo ken breman. Dleout a ra d'in eun digoll.

PERIG

Ha pegement eo e c'houlennno ar c'hemener da ober d'eoc'h eur jupen nevez?

FIRBOUCH

Triouac'h lur da nebeuta.

PERIG, *o sonjal.*

Mat; daou vil nao c'hant lur ha pevar ugent, hag ouspenn, triouac'h lur, kement ma a ra, en holl, tri mil lur nemet eiz real. *O rei da Firbouch e yalc'had aour.* Sellit, tad koz, ez eus tri mil lur er yalc'had se. Kemerit i da baea dleou Fanch, roit eiz real d'in, hag echu e vezo an abaden.

Firbouch a ro eiz real da Berig.

FIRBOUCH

Me roio d'eoc'h eun diskarg evel just.

PERIG

Tamm ebet. Roit an diskarg da Fanch. *Firbouch a skriv an diskarg war eur paper.*

FANCH, *tenereat e galon.*

Petra rez, mignonig? Rei a rez kemend all a arc'hant d'in hag am eus skoet ganez ker krenv ha ker start! Perak 'ta?

PERIG

Me zo va unan penn war an douar, Fanch, ha c'houi a zo c'houec'h bugel ganeoc'h.

FANCH, *o ouela eur banne.*

Setu ma cuelan evel eur plac'hig breman. Deus da boket d'in, keaz Doue. *Poket a ra Perig da Fanch.* Ha selaou mat: Me roio d'it, evit netra, da voed hag eur c'hambrig vrao, em zi, ken na vezo kavet ganez al labour a glaskez.

PERIG

N'em eus ket ezom. Emaoun o vont kuit pelloc'h.

FANCH

Ne d-i ket, ne d-i ket; chom a ri eun tammig da nebeuta ganen.

FIRBOUCH, *da Fanch.*

Setu an diskarg. Kenavo; n'em eus mui tra da ober aman.

FANCH, *laouen.*

Eo da; deuit da eva eur banne d'am hostaleuri, p'eo gwir eo bet great ar stal ker brao etrezomp. Deus 'ta ive Perig.

PERIG

Ia, mont a ran dioc'htu war ho lerc'h. *Firbouch ha Fanch a ya kuit.*

XXIII DIVIZ

PERIG, *e unan.*

Ha setu me ker paour ha biskoaz. Eiz real! eiz real en holl, eleac'h tri mil lur a yoa, n'eus ket pell, em godel. Mat. Nep a c'hell labourat n'en deus aon ebet rag ar baourentez. Gwasa tra zo m'eo eat kuit va mignon karet Gwenole, en deus va dilezet en eur va gourdrouz eun tamm. Pebez paotr dispar, a baree ar re glanv, a bede dalc'hmat an Aotrou Doue. Eun eal bennak e oa anezan, a gav d'in. Na perak 'ta en deus va fedet ker start ma 'z afen da gaout va zad kovesour? Daoust hag eur c'huzul fur e ve? *Eur c'hloc'h a zon pellik.* Selaout! Kloc'h ar barrez eo o seni an anjeluz. Abardaezi a, ra; stereden an noz a welan. N'ema ket c'hoaz, marteze, an aotrou person gant e goan. Mont a ran d'her c'haout. *O saludi an dud.* Kenavo bremaik, kristenien vat.

AR GOEL AR ZISKEN.



EIL LODEN

Kement ma a dremen pelloc'h eget an douar. Bez' ez eus, e goueled an teatr, eun nor gaer kempenn mat gant ar pezh a gerot, bleun, garlantesiou, traoù brao a bep seurt. Skrivet eo warni, gant lizerennou aour: DOR AR BARADOZ.

KENTA DIVIZ

PERIG, *e unan*, SANT PER *adre dor ar baradoz.*

E peleac'h emoun aman? N'anavezan e nep giz ar vro ma. Dihuna a ran a gav d'in, diouz eur c'houisk ha n'en deus ket e bar war an douar. *O trei.* Sellit 'ta! Dor ar baradoz! Daoust ha maro e vijen, o veza ken tostik se da zor ar baradoz? Nag hi zo kaer! nag hi zo brao! Gwenn, alaouret, garlantesiou ha skeudennou outi! Perak 'ta ne glaskfen ket me mont ebarz kerkouls ha kemend all a dud? E peleac'h eo ar morzol da skei outi? Morzol ebet. Bez' ez eus eur c'hloc'h, neuze, e doare. Kloc'h ebet. Sant Per! mar plij. Sant Per... Ne respount na ger na grig. Ha me jomo aman neuze, va unanik, beteg ar varn ziveza? Sell! va c'horn-boud zo deuet ganen, va c'horn boud a c'halve ker kaer an dud, n'eus ket pell, e Plabenneg. *Seni a ra frank gant e gorn boud. Respount ebet. Seni a ra krenvoc'h krenva.*

SANT PER, *adre an nor.*

Petra eo an trouz se a glevan; piou a ve o terri evelse peoc'h dudioz ar baradoz?

PERIG

Me eo, Sant Per, me eo Perig, ho fillorig.

SANT PER, *adre an nor.*

Te, va Ferig, n'eo ac'hanout nemet eur penn-glaouig. Kredi a rez, neuze, e teuer d'ar baradoz rag eeun er c'hiz se, paour keaz? N'eo ket. Ar re zalvet a ya holl, kouls lavaret, da ober da genta eun droig bennak er purgator.

PERIG

O va faeron karet, n'em eus ket gwelet zoken ar purgator war an hent ma teuer aman gantan. Me zo deut aman en eun taol nij, evel eur goulmig Vreiz, a denn askel. Digorit d'in mar plij. Sant Per, va zant Per chentil!

SANT PER, *adre an nor.*

Mat; ne c'hellan ket rei digor d'it. Chom aze da ober da burgator.

PERIG

Allaz Doue! e peleac'h ema neuze ar re am eus ker karet, va eal mat, santez Anna ha santez Barba? Petra reont eleac'h dont d'am difenn?

SANT PER, *adre an nor.*

Ema ar re ze holl em c'hichen. Mes lavaret a reont d'in ez eus, dioc'h gourc'hemen an Aotrou Doue, eur zant all en devezo ar blijadur d'az lakaat da vont d'ar baradoz.

PERIG

Pehini, Sant Per benniget, pehini?

SANT PER, *adre an nor.*

Gwenole.

II DIVIZ

PERIG, SANT PER *adre an nor*, GWENOLE,
GWENOLE, *gant an e vez aour hag an hevelep dilhad
evel el loden genta.*

Ac'hanta! Perig, emaout demdost d'ar baradoz, a gav d'in; ha me eo a lakaio an nor da zigeri evidout. Me, Perig, eo ar paour keaz paotr marvet e Plabenneg ha m'ac'h eus roet da dri skoed evit ma vije lavaret teir oferén evitan. Sonj ac'h eus?

PERIG

Fresk beo eo va zontj.

GWENOLE

Mat. *O komz tost d'an nor.* Sant Per!

SANT PER, *adre an nor.*

Petra zo?

GWENOLE

Hennez, Sant Per, ho fillor Perig, en deus roet e dammig arc'hant evit an Anaon. Hennez en deus roet e aour evit tenna an dud reuzeudik eus an dienez. Hennez en deus great vad d'ar re o doa great droug d'ezan. Hennez oa mat e galon. A hend all, daoust ha n'en deus ket lavaret hor Zalver: Eurur ar re a zo trugarezus, rak trugarez a gavint o unan?

SANT PER, *adre an nor.*
Gwir bater eo.

GWENOLE

Aotrou Sant Per, en hano hor Zalver Jezuz, ra
vézo karet ha meulet da viken, digorit da Berig,
me ho ped, dor ar b̄aradoz.

*An nor a zigor. Perig, beuzet en eur mor a leve-
nez, a zav huel e zivreaç'h hag a ya er baradoz.
Gwenole gantan.*

AR GOEL A ZISKEN EVIT MAT.

